

KIS-478 – Gl. si et seulement si

(YBAN da GE – 24 09 95)

Skrivañ a rez [e maladur kentañ GSTL. ¶ 2977] : “ gwir eo an ec'hankad *pa* vez ha *pa* vez hepken disheñvel an daou enankad. ” Perak ne rez ket gant *mar* ? Da skouer : “ bezet daou niver, par ez int *pa* vez ha *pa* vez hepken mannel an diforc'h etrezo ” pe : “ *mar* bez ha *mar* bez hepken ” ? Kompren a ran arver ar bongevor reol evit un niñvader — ur vezaozenn alvezel —, pa'z eo un afer a zegouezh. Ha heñvel eo gant un niñvader jedoniel ?

(GP da GE – 10 06 96)

[Goude lenn en danvez *Dornlevr Jedoniezh* gant YBAN ar frazenn-mañ : “ Kediad un daveadur \mathcal{R} eus E da F gant un daveadur \mathcal{S} eus F da G zo an daveadur eus E da G a ere un elfenn x eus E ouzh un elfenn z eus G, mar ha nemet mard emañ y en F, $x\mathcal{R}y$ ha $y\mathcal{R}z$. ”]

Un dra zo diogel : divrezhonek groñs eo arverañ *mar* estr eget rageeun dirak ur verb ; dre ret e ranker da skrivañ *mard emañ / eo*, ha neuze e kejer gant troiennoù ponner a-seurt gant ‘ *mard emañ ha mard emañ hepken...* ’ Soñjet 'm eus adarverañ krBr. *hepquet quen* = hep(mui)ken, divoas hiziv evit kement a onn, hogen sklaer awalc'h e savadur, a gredan, ha lavarout neuze *mard emañ / eo hepketken*. Petra a soñjfes eus ar c'hinnig-mañ ? Rak un dra zo anat, dic'hallus krenn eo **mar ha nemet mard emañ / eo* ; monet a rafe a-enep da ziazevad donañ an holl geltiegoù a c'houll ma ve heuliet rageeun nep isstagell gant ar verberead. Ar verberead emeve ha neket ar verb rak un isstagell a c'hell bezañ heuliet gant ur raganv enharpel, sk. *mar en gwelan* zo evit gwir, daoust da'r skritur, da vezañ jubennet en ur bloc'had /marengwelav^^/. Ac'hann ma c'hinnig a-zivout adarver *hepketken*, hogen mar kavez un droienn a ve gwell, ne glemmin ket gant ma kloto gant framm ar yezh ; forzh penaos, er-maez eus tachenn ar jedoniezh (hag ar veizoniezh) ne reer e yezh voutin ebet gant troioù a-seurt gant ‘ si et seulement si ’ ha neuze e c'haller sellout ouzh an droienn evel kalvezel en holl yezhoù.

(GE da YBAN – 23 06 96)

Mar intentan mat e reer anv eus un amplegad digen. Sk. : “ Dre ar pellgomz e tiraezer YBAN *mar ha nemet mar* enanker an niverenn-mañ-niverenn.” Ha re her e ve aozañ un droienn diwar *mar* ha *digen* “ [...] e tiraezer YBAN *a-zigen mar* enanker [...] ” ? An arvar eo intent *a-zigen* evel o tougen war “ diraezer ” ha n'eo ket war “ enanker ” nemet e teufe an arver da gempenn an intenterezh... Pe neuze kemer *digen* da adverb hag ober gant *digen mar* hep mui : “ [...] e tiraezer YBAN *digen mar* enanker [...] ”, o vont da *digen mar* evel d'ur stagell ? A-benn ar fin ne ve nemet erlec'hiañ *digen* ouzh *hepken*, o reiñ dezhañ ar ster kreñv arbennik d'an droienn jedoniell : *mar ha nemet mar* \emptyset *mar ha hepken mar* \emptyset *digen mar*.

(YBAN da GE – 26 06 96)

Kavout a ran gwell *mar ha nemet mar*, ma n'eus abeg sonn ebet a-enep. Diaes e kavfen ober gant *digen mar*. Troiennoù e-leizh a gaver evel “ *mar an diaoul, mar youl*, etc. (*gwenneg*) adv. Du diable si... (un sou me reste) ” (ERNAULT, *Geriadurig brezhoneg-galleg*). Gwelout a ran ivez e DGVB. p. 263 e teu “ *nem-et* « excepté, sauf », de **nam-et* comme *eged* de *hac-et*, *bennak-et* à côté de *bennak* ” hag a-benn ar fin ez eo Br. *nam* a dalvez "sauf si" : hBr. “ *na(m) hint errei* "sauf s'ils (de) son espèce" ” DOB 522. Hag un dra bennak a c'haller tennañ ? Sz. *only if*, Al. ...*genau dann...*, *wenn...* Sk. : “ *Eine lineare Abbildung f* ist *genau dann umkehrbar*, *wenn der Kern von f* nur aus dem Nullvektor besteht. ” A-hend-all e lennan e GSTL. ¶ 855 : “ *na* vint erounezet *nemet mar* bez eus amplegadoù 'zo. ” Neuze, evit klozañ, Gl. *si et seulement si* (berraet alies e *ssi*), Br. *mard eo ha nemet mard eo*, met kenkoulz e kavan *mar ha nemet mar* (hag an eilstummoù) a c'hallfed skrivañ : *mar (ha nemet mar)*. Gallout a rafemp heuliañ ar galleg en degouezh ha skrivañ : Br. *mmar*. Gant hevelep berradurioù e reer endeo, da skouer : *pe / no*.

(GE – 09 08 96)

Hag eñ zo aze un afer a stad, pe gentoc'h a *framm* ? Hep mar na marteze ez an da heul GP pa sav da zifennour taer *framm* ar yezh. Hogen, en degouezh n'emañ ket an kez *framm* en arvar ? Evidon me a glev kinnigadenn YBAN evel ur goulenn reiñ digor d'ar stagell nevez *mmar* en he stumm kurzhet, *mar-ha-nemet-mar* en he stumm dispak. Daoust ha degembezadoù ne ve mui gant an neñv mar geltiek ve ?

